

VAR AR MENEZ

Ton : *O Vierge, fontaine, rocher.* (Kantick Lourd)

Var ar menez ar Bastored
A greiz diouall ho denvedigou,
Souden en noz sklerijennet
Ho deus klevet e bar an envou :
Nouel, Nouel, Nouel da Jezuz. (bis)
Aberz Doue eur burzud braz
Var an douar a zo c'hoarvezet ;
Hag an Elez a respontaz :
Eur Zalver evidoc'h zo ganet.
Hag ar Bastored etrezho
An eil d'egile a lavare :
Kerzomp, brema ni a velo
Hor Zalver, hor Mestr hag hor Roue.
Selaonit oll, eme an El,
It da Vethleem, da gear David ;
Eno e kafot eur bugel
D'ezhan a greiz kalon lavarit :
En eur chraou digor d'an amzer,
Ha var eun tamik plouz astennet
Eno e veljont ar Zalver,
Ar bugelik nevez mailluret.
Evel ar Bastored, sentuz
D'an Elez ho deuz ho c'helennet,
Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz,
Epad an nozvez-ma benniget.
Evel guechall holz an envou,
An Iliz a zo sklerijennet ;
Kingomp oll hor c'halonou
D'hor Mabik Jezuz muia karet.
Mabik Jezuz hor guir Zalver
Brema var an douar diskennet,
Er Zakramant euz an Aoter
Ra viot da viken adoret.
Mabik Jezuz, o diskennit
Dre nerz ho Sacramant adoret ;
Diskennit ennomp, ha mirit
Na vezimp taget gant ar pec'hed.
Pa deui evidomp ar maro,
Hon digemerit gant karantez,
Ha da virviken ni gano
En ho Paradoz gant an Elez. H. DU R.

8N3-2-030

KANTIKOU NEDELE E PARREZ PLOUVERN DALC'HOMP D'OR FEIZ!



DISKAN :

*Da feiz hon tadou koz, ni potred Breiz-Izel,
Ni zalc'ho mat ato ;
' Vit feiz hon tadou koz, hag en dro d'he baniel
Ni oll en em stardo !
Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho
Kentoc'h ni a varvo !*

1

D'ar c'hrouadur bihan, e kichennik e gavel,
E lakit eur vam vat, en deiz evel en noz ;
Er boan hag en anken, houman buhan ra eur zell
War ar groaz santel... e zonzj er baradoz.

2

D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, c'hui ziskouez hent ar furnez,
C'hui lavar en heuilla hep krena dirag den ;
Bezit, tud yaouank Breiz, bezit epad ho puez
Ato gwir gristenien, ha morse treitourien.

3

D'an den koz, gwen e benn, e korn an tan azezet,
O skuill dañlou a geuz war e amzez gentà,
Varlerc'h kalz a boan, c'hui lavar, Salver ar bed,
Er baradoz e vo eürusted evitha.

4

D'an den diwar ar maëz, hag ive d'an den a vor
C'hui a ro nerz-kalon er poaniou stourm outho,
Gouzout reont en env, e kavint oll dor zigor
Ar vuhez zo bet tenn ; d'an drubuil kenavo !

NI HOC'H ADOR

Var Don : *Peger kaer ez eo Mamm Jezuz*

DISKAN :

*Ni hoc'h ador, Mabik Jezuz,
Mabik dous ha karantezuz,
Doue meurbed madelezuz.*

Mabik Jezuz, e kreiz an noz,
C'houi a zilez ar baradoz,
'Vit dont en hon touez heno.

Mabik Jezuz, Doue-Bugel,
Ra vezo klouar an avel
En noz-man, en dro d'ho kavel !

Mabik Jezuz, dre an envou
Eled a gan deoc'h kantikou...
Perag 'glevan-me ho klemmou ?

Mabik Jezuz, me oar ervad
Perag e vouel ho taoulagad ?
Hor pec'hed 'ra deoc'h kalonad !

Mabik Jezuz, evit bepred
O me a dro kein d'ar pec'hed.
Va c'halon deoc'h zo gounezet.

Mabik Jezuz, hed va buez,
Me a veulo ho madelez ;
Ra varvin en ho karantez !

HANTER NOZ EO

Var Don : *Kavet emez ar peoc'h*

Hanter noz eo ! Deut eo ar momet santel !
An Den-Doue a zisken davedomp.
Lemel a rai ar pec'hed orijinel :
Kouinnar he Dad vo troët divarnomp.

DISKAN :

*Gloar d'Hor Zalver ! En noz-ma ken burzuduz,
Ra vo dre holl meulet he drugarez !
Var hon daoulin, kanomp gant eur vouez nerzuz :
Nouel ! Nouel da Vabik ar Verc'hez ! (bis).*

Ra zeui, ennomp, ar feiz gant he sklerijen
Da ziskouez deomp kavel an Den-Doue,
Egiz ma oue guechall, gant eur stereden,
Beteg ennhan kasset an tri Roue.

Tud gallouduz, lorc'h ennoc'h gant ho madou.
Roue ar bed en eur c'hraou zo ganet !
Tostait outhan da glevet he genteliou,
Hag e reot fae var an holl draou krouet.

Gant Hor Zalver hor chadennoù zo torret ;
Breman omp libre ; digor e deomp an Ee.
Eleac'h beza sklavourien d'an drouk-spered,
Breman ez omp bugale da Zoue.

Poaniomp, poaniomp da ziskouez d'ar Bugelik
Hor c'harantez, hon anaoudegez vad.
Lavaromp holl stouët dirag he graouik :
Kentoc'h mervel eget dont d'ho kuitât !